

84

SON AR PLAC'H VIAN

Savet gant Philo. Cadoret euz Coadout (Côtes-du-Nord)

(*Sôn da gana a leiz-korzen*)

442

1

Al laboused a gân. an eol a zo laouen :
Pegen kaer hor meziou gant ho bleuniou melen ! — Oh !
Pegen kaer hor meziou gant ho bleuniou melen !

2

Pegen kaer d'ar pastor c'hoari el lannek vraz,
Pegen kaer d'an alc'houeder nijal en oabl glaz ! — Oh !
Pegen kaer d'an alc'houeder nijal en oabl glaz !

3

Ha d'in me plac'h vian kas lein d'an eosterien,
En eur gana dibreder 'hed ar venojen ! — Oh !
En eur gana dibreder 'hed ar venojen !

4

Aze er parkad ed 'ma Yannik va mignon,
Eur paotrik mad ha krenv ha leal he galon. — Oh !
Eur paotrik mad ha krenv ha leal he galon !

5

Me meuz tost da gant skoued ha Yannik en deuz daou,
Pa deuiou Gouel Mikeal ni skrivø 'n embannaou. — Oh !
Pa deuiou Gouel Mikeal ni skrivø 'n embannaou.

6

Prenet e vo eur vioc'h, ha savet eun ti-plouz
E kichen ar feunteun en draoniennik didrouz. — Oh !
E kichen ar feunteun en draoniennik didrouz.

7

Eno pell diouz ar bed, hag oll d'he c'harante
Plac'h bian Breiz-Izel a gano noz ha de. — Oh !
Plac'h bian Breiz-Izel a gano noz ha de.